

KLENVED AR VRO

PE

HISTOR EUR ZOUDARD IAOUANK PAREET GANT EUN TAMM BARA.



KLENVED AR VRO

TON : *Ma c'halon a zo fraillet.*

1.

Vardro divez ar brezel, ar brezel ken euzuz
A zavas, enn hon amzer, 'tre Bro-C'hall hag ar Pruss,
E Genev, en hospital, edo tost da vervel,
Eur paour kez soudard iaouank ganet e Breiz-Izel.

2.

Keit ma hen doa bet iec'hed da vont var an dachen,
Hen doa stourmet kalounek, 'vel eur zoudard kristen ;
Mes, an hini ioa choumet bepred stard enn emgann
Gant ar riou, an dienez oe diskaret buhan.

3.

Setu hen kouezet guall glanv, kaset d'an hospital ;
Mes eno ouz he glenved e stag eur c'hlenved all :
Deiz ha noz da Vreiz-Izel he spered a zistro,
Ha gant he galoun, siouaz ! ema *klenved ar vro.*

4.

Guall stard eo dezhan mervel ken pell oc'h douar Breiz,
Ha ken pell oc'h he gerent, hag e lavar eun deiz :
« Araok mont euz ar bed-man, me 'meuz c'hoant, ha c'hoant braz
« Da velet da viana va zad eur veichik c'hoaz. »

5.

Raktal e kaser kelou da dud ar zoudard kez.
Neuze pebeuz kalounad ! Neuze pebeuz enkrez !
Koulz koude eun tamm fizianz 'n'ho c'haloun e talc'hont :
Marteze n'eo ket kollet... He dad 'ielo du-hont...

6.

An hent zo hir ha poaniuz : treuzi Bro-C'hall a bez ;
An tad ive zo guall goz. Mad ! mont a ra gant prez.
Dizale, a bouez poania, setu hen digouezet :
He vab a zo dirazhan... Eun druez he velet !

7.

Pa vel ar paour kez klanvour he dad en he gichen :
« O va zad ker, emezhan ; breman 'varvin laouen ! »
— « Arabad digourachi ! a respountas an tad ;
« Arc'hant emeuz digaset ; me 'breno d'id traou mad... »

8.

« — Traou mad ! eme ar c'hlanvour. O ne dalv ket ! Pell zo
« An traou ar guella blazet emeuz donjer outho ; »
Hag e kouezas adarre skuiz-marzo ; hag he dad
Oc'h he velet a zave an dour 'n'he zaoulagad.

9.

Ne c'houie petra d'ober, pa deuas da zonzal
Ez oa choumet 'n'he zilerc'h eun tamm bara segal,
Hag e kinnig anezhan d'he vab, 'n'eur lavaret :
« Sell aman eun tamm bara græt gant da vamm garet ! »

10.

Kerkent ha ma eo kouezet ar gomz-se 'n'he skouarn.
Ar c'hlanvour, o vouz'hoarzin, a astenn he zaouarn :
« O ! eun tamm d'in, emezhan ; rak, naoun emeuz brema ;
« Abaoue keit all amzer n'e meuz debret netra ! »

11.

Goude ar begad kenta e c'hoanta kaout eun all,
Hag eun all c'hoaz... Ar c'hlanvour bete neuze ken fall
A zant ema adarre he nerz o tont en dro.
Hen araok ken drouklivet a zeu dezhan liou brao.

12.

Ha dalc'hmad e lavare, dre ma zebre eun tamm :
« C'houeka bara eo he-man ! bara græt gant va mamm ! »
Bemdez, adalek neuze, ez eas var vellaat ;
Ha dizale d'ar gear e tistro gant he dad.

13.

Eneou ar gristenien aliez zo henvel
Ouz korf ar zoudard breizad ; dare int da vervel.
Ha ne deo ket eur souez ; rak eleiz a ziouer
Magadurez ho ene : Sakramant an Aoter.

14.

C'hoant hoc'h euz-hu da zerc'hel hoc'h ene beo ha krenv ?
Gant ho mamm, ar guir Iliz, ema bara an Env.
Debrit outhan aliez, ha c'houi velo neuze
Pegen c'houek eo d'ar galoun, pegen mad d'an ene.

A. M. D. G.